

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

## 27. ANN AOT. GLUDONOU

Selaquit kana me ho ped  
 eur chanson nevez kompozet  
 d'ann aotrou Gludonou ez eo gret,  
 da glask he voued a zo eet.  
 Kenta aluzen en devoa bet  
 oa eur skudellad iod silet  
 hag ac'hano ez eaz da di'r Morvan  
 da c'houl eunn tam bara d'he goan.  
 Ac'hano da di'r Riou da c'houl beza lojet  
 gant ar goanta euz ar merc'hed.  
 - Gant ho merc'h Janned mar keret.  
 Ann hini koz en deuz komzet  
 d'he verc'h p'en deuz he glevet.  
 - Va merc'h Janned, ne ouzhoc'h ket,  
 Ahont euz eur paour deut d'ho kwelet.  
 - O va Doue, ha /posubl/° e ve °a-us : red  
 me mestrez /war/ bemp kant skoet leve  
 eo eur c'hlasker boued am be.  
 Ann aotrou Gludonou pen deuz klevet  
 euz a dal ann nor ez eo eet.  
 he habit alaouret en deuz lekeet  
 hag he zad dezhi en deuz lavaret:  
 - Ann aotrou Gludonou ac'h euz refuzet.  
 Va merc'h, ke buan, lavar dezhan mad  
 me a zo koz, ne velann hanter berad.  
 - Aotrou Gludonou, exkuzit d'am zad,  
 va zad zo koz ha ne vel berad.  
 Ann aotrou Gludonou en deuz lavaret  
 da Janned ar Riou pen deuz he c'hlevet :  
 - Janned ar Riou, ha c'houi ve kountant  
 da veza Introun e traon ar stang ?  
 Janned ar Riou pe deuz klevet  
 Troad oc'h troad gant-han a zo eed.  
 Ann Aotrou Gludonou pa zeo erruet  
 Debonjour hi e deuz lavaret.  
 - Bonjour ha joa en ti-ma,  
 digas eur gador din dazeza  
 peo me vezo ar verc'h kaer ama.  
 Ann introun goz, mam ann aotrou  
 a lavaraz da Janned ar Riou :

- 76 -

- Merc'h kaer ama c'houi ne viot ket,  
 na c'houi na merc'h tiek ebet.  
 Janned ar Riou pe deuz he c'hlevet  
 da ouela a zo en em lakeet:  
 - Aotrou Doue, petra rinn brema  
 pe vont d'ar gear pe choum ama.  
 Mar d-ann d'ar gear gwelet e vinn  
 Mar d-ann d'ar stank beuzet e vinn.  
 Kelen oc'h Doue a c'houlennaz  
 Ali an diaoul a gemeraz  
 er stang war he fenn en em daolaz.  
 Kenta a ioa dre eno eat abiou  
 oa mestr chaseer ann aotrou  
 - Aotrou Gludonou, ne ouzoc'h ket,  
 er stang ez euz eur plac'h beuzet.  
 Na dioc'h he boutou hag he lerou  
 Me gred eo Janned ar Riou.  
 - Mar deo Janned ar Riou beuzet  
 em bolz-me e vezo lekeet.  
 An introun goz, mamm an aotrou  
 a lavaraz d'he map Gludonou :  
 - Hor bolz-ni ne vo ket digoret  
 da lakaat merc'h tiek ebet.  
 - Bezet droug e nep a garo  
 hounnez em bolz-me a ielo.  
 Ma zaimp hon daou enn eur besiad  
 pa nomp ket bet enn eur guelead,  
 ma zaimp hon daou enn eur bez doun  
 Doue ra bardouno d'ann Anaoun.

vvvvvvv